



CANTIC

AR BUGUEL PRODIG.

*Pehini a zo meurbet profitapl da zisqüez d'an
dud yaouanq da zioüal diouz ar güin ha
diouz ar merc'het.*

Var ton ar Falz Pinvidic.

ENTENTIT oll Bretonet, hac e cléfot cana,
Buez ar Buguel Prodig, mar gallàn discléria :
Plijadur ho pezo sur, mar qirit ententi,
Ha profitapl eo ive ouz tad ha mam senti.

Cetu amàn en antier buez ar Mab Prodig,
A voa en e liberte abaoue yaouanqic ;
E dad, e vam en leze da c'hoari ha tripal :
Diouz goal gompagnunezou e tle pep den dioüal.

Calz a dud zo er bed-màn ha ne sourciant qet
Pe a lec'h e teu madou, pa n'o gonezont qet,
Evit o drouc implija ne reont cäs a ze :
Nep o deus-e gounezet o deus bet poan gante.

Tad ha mam me ho suppli, ha mestr ha mestrezet,
 Corrijit an dud yaouanq, ha dalc'hit-e sujet;
 Difennit oute ar güin, ar c'hartou, an dansou :
 Cassit-e d'an Oferen ha d'ar C'hatekismou.

Clévit oll, tud pinvidie, pa oc'h eus ar voyen,
 Corrijit ho pugale hac ho servicherrien;
 Na roit qet liberte en yaouanqis dê re :
 Disqit deze oll abret da zervicha Doue.

Grit deze monet bemde da glêvet oferén,
 A bella diouz an den pep seurt goal blandeden,
 Enni ez eus eun tenzor hac a zo caer meurbet,
 Represanti Passion hor Zalver beniguet.

Emân voa eun den yaouanq ha na rê cäs ebet
 Pe a lec'h e teu madou, pa n'o goneze qet :
 Qer prompt evel ar grizill pe ar gliz e mis mae.
 Vize an arc'hant gantân, cher vad, c'hoari a rê.

Ur spaç a amzer e voe e ty e dad maguet,
 Madou bras a zispigne, ha na rê cäs ebet,
 Gant ar c'hartou, an dançou, ar güin hac ar merc'het.
 O tispign en un devez tostic da zaou c'hant scoet.

Ne voa nemet pemzec vla pa c'houlennas qenta
 E bartach diouz e dad, ma carje e rêi dezâ;
 Mes e dad a estime, pa vije deut en oad,
 E teuje dezân sqiant pelloc'h da evessât.

E dad hac e vam bemde a bede evitâ
 Jesus hac e Vam Mari da rêi ar c'braç dezâ

Da veza un den honest, evel ma oant-y bet;
 Evit qement m'er pedent, oute ne zente get.

Un devez e lavaras sur d'e vam ha d'e dad,
 Me renq hirio caout arc'hant evit ober cher vat;
 Me a zo un den yaouanq eus a gondition,
 Hac a renq ober cher vad gant an dud a fêçon.

Pa voa pemp bloas varnugent, e lavaras d'e dad :
 Me a ranq caout va fartach bremâ en ur yalc'hat;
 Me a yêlo da vale evit guelet ar vrô,
 Ha ma cavàn va fortun eun tu, m'e c'hemero.

E dad a respont dezâ gant carante bepret :
 Me ro va bennos deoc'h gant caraute barfet;
 Ho pezit sònj a Jesus, ne ancounait get
 Ar c'homzou en deus ho tad alies lavaret.

Neuze e roas e dad dezàn trêgont mil scoet
 En aour fin hac en arc'hant en ur yalc'hat contet :
 Cetu aze ho partach, pa fell dêc'h hor c'hüitât :
 Doue roi deoc'h e c'hraç d'ober ur veach vat.

Qenta repas a eure ar Prodig obstinet
 Voa en un hostaliri gant ur vanden merc'het,
 Servichet mad voe certen en deiz-se da goania,
 Sonerien evit dansal, plac'h coant da servicha.

Pa vise'r gompagnunez ous an daol azeet,
 E voa en e blijadur ha gantàn ar merc'het;
 Qeit ha ma pade arc'hant, cher vat a rent gantàn,
 Plijadur bras a gavent ober goab anezàn.

P'oa dispignet e arc'hant, e vije trist meurbet,
 E lar d'e gompagnunez n'en deus liard ebet;
 Mes ractal e hostises dezàn e deus respontet:
 M'o tivisco, compagnun, ma na ven-me pèet.

Pa voa goastet e arc'hant, ne voa netra chomet,
 E falle dezàn c'hoari, ober cher vat bepret;
 Mes a dauliou qeuneudon e voe prest qempennet,
 Tennet e vleo ouz e benn ha qerqent divisqet.

Goude ma voe chasseet eus an hostaliri,
 N'en devoa qet a zillad, nac a voed da zèbri;
 Un drue voa e glêvet o crial en henchou,
 Gant riou ha naon en devoa goude e oll cheriou.

Neuze e tistroas c'hoas d'ar guêr da dy e dad,
 Evit goulen da loja evel eun tremeniat:
 En han' Doue, emezàn, m'ho ped hac ho suppli
 Da loja eun tremeniat zo scuis ha na ell mui.

Pa voa lojet gant e dad, n'en anavee qet,
 En a ouye an doare, mes n'en disqêeze qet,
 Pa voant êt oll da gousqet, én a gassas gantâ
 Vesseliou aour hac arc'hant demeus ar re gaera.

Neuze en em gavas prest gant he hostaliri,
 Hac en devoe evite da eva, da dibri;
 Qeit ha ma padjont outàn bepret e rê cher vat,
 Mes ne badas qet pell bras ar vech-se ar yalc'hat.

Neuze e voe tracasset, injuriet gante,
 Evel eur forban hasnet voa da velet neuze;

Hac o tonet da zònjâl e voa ur pec'her bras,
Pa voe bolonte Doue en em gonvertissas.

Pa zònjâs en e vuez, e sellas ous an eê,
O sellet pebes fortun bepret a rancontre;
Monet a eure neuze, goude e voal vue,
Da evessa al loened o tistrêi ous Doue.

Monet a eure neuze d'un ty da servicha,
Ma vije o bolontez da rêi souten deza.
Me chomo da labourat en arat, mar qeret,
Pe autramant me a yêl da viret al loenet.

Neuze e laras dezàn ar merer ac'hane :
N'anduràn qet an dud scàn a ve bet o vale;
Me meus tud da labourat qement hac a so ret,
Nemet da viret ar moc'h mar qeret e chomet.

En han' Doue, emezàn, va mestr, me ho suppli,
Me rai vel ma lavaret : va mirit en ho ty;
Mar gallàn ho servichâ evel ma leveret,
Qeit ha ma plijo ganêc'h evit caout un tam boed.

Neuze e zeas ar Prodic da vessa ar moc'h-se,
O tont da gonsideri güechal en e vue,
En devoa grêt cheriou mat, ha drouc distribuet,
Ha bremâ en paourente n'en devoa esqen boed.

Un druez voa e glêvet en noas beo o crial,
Gant paourentez ha fatic goude e reus fall;
Gant naon e voe surprenet qen a rancas dibri
En ul laouer gant ar moc'h a bep seurt vileni.

Güell ve da un den certen beza nao de var yun
 Eguet ober re gorfat, na beza disasun,
 Coll a ra e zantimant neuze gant re gorfat,
 Ha m'ar caret e lezel, e rai eun drouc benac.

Beza escus debochet ha drouc implij madou,
 Ar merc'het fall hac ar güin zo caus da valeuriou,
 Ha goude ar foll dispign e zeont d'en em gana;
 Cetu siouas maleuriou goude drouc implija.

Peguen lies a zen sur a zo var ar bed-màn,
 A zo bet pinvidic bras, allas! zo paour bremàn!
 Goude prodigalite, eva güin ha c'hoari,
 E vézo trist ar Prodig, ma na ve da zibri.

Goude e foll dispignou, cétu en distroet
 Da veza den gracios, humbl meurbet ha parfet;
 Pa voa bolonte Doue en em gonvertissas,
 Hac e teuas ar vech-se d'ar guer morc'hedus bras.

Goude-se en em rentas e qichennic e dad,
 Hac e teuas da sònjal gant ur volonte vat:
 Autrou-Doue, emezàn, ha m'em be hardisson
 Da vonet dirac va zad, ha me qen dirêson.

Me a ya en han' Doue, emezàn, da antren:
 Deiz mat déc'h, c'houi a bedàn, cetu ho courc'hemen,
 Cetu ho mab hirvoudus: lavaret mad ho poa
 E vizen e paourentez, ma ne garjen poania.

Va mab, me a zo joaüs d'ho peza distroet,
 Meulet bremàn a galon a Verc'hez benignet;

Me am boa digant Doue pell a zo deziret,
Evit clêvet ho toare, pelec'h e vijec'h ét.

Me so ar maleürussa a voe biscoas er bed :
En hano Jesus ha Mari, va zad, va fardonet :
Me meus goall distribuet ar pez ho poa roet
Din da ober va frofit, ma carien o miret.

E dad a laras neuze d'e oll servicherrien :
Ret eo laza eun oan læz, un oc'h hac un eujen ;
Da ober ur banqet caer d'am mab zo distroet ;
Ret eo dont, va zud qeaz, varc'hoas d'e velet.

Calz a dud zo er bed-mâ evel ar Mab Prodig,
Hac a zo anval ive ouz ar Falz Pirvidic ;
Er bed-mân eo e gevont amâ o baradoes,
N'o deveus sônj a Jesus nac e Vam ar Verc'hez.

Me ho suppli, tud yaouanq a bep sort qalite,
Tud a bep condition, hac ar re gôz ive,
Diouz goall gompagnunez da zioüal bepret
Ar c'hoari, an nôzveziou, ar güin hac ar merc'het.

Ar re-ze siouas, a zo da galz occasion,
Da ober calz maleuriou hac o daonation :
Caledet int nôz ha deiz ebars en o fec'het,
Fê eo gant calz o c'helen en hent da veza salvet.

Ma caremp consideri en Mari-Madalen,
Zo en em gonvertisset gant ur sermon hepquen,
Ni ne reomp cäs, siouas, evit clêvet bemdo
Sermoniou, buez ar Sent, hac exemplou ive.

Allas! nac a oferen bret, na sermoniou ive,
 Ne gar qet tud obstinet n'o deus doujanç Doue,
 Na Catekismou da Sul, ive d'ar Goueliou din,
 Cetu, siouas, an henchou a gundu d'ar goal fin.

Diou gonsideration a rencomp da gavet
 Evit miret ouz an den ne ve qet condaonet :
 Ar c'henta caret Doue dreist madou ar bed mán;
 D'an eil, aon rac an ifern, a zo carguet a boan.

En han' Doue, Christenien, greomp oll orêson
 D'ar Vere'hez sac'r, Mam Jesus, bemdez a vir galon,
 D'hon Æl-mat ha Gardien, d'ar Zent ha d'hor Paëron,
 Zo hon güir Advocadet dirac Roue an Trôn.

Clêvet oc'h eus an histoar, ha mar qeret miret
 Dious prodigalite dont da diññal bepret ;
 Goulennomp digant Jesus hac ar Vere'hez divin
 Ar c'hraç da vont d'e veuli er Barados er fin.

FIN.

E Montroulez, e ty LÉDAN, e trañn ru ar Vur.